

**Ar c'hozh paotr yaouank kozh**

Chomet on da goshaat ha n'on ket c'hoazh dimezet  
Ha dre-se on gwelet fall gant kalon ar merc'hed

Ar merc'hed a oa gwechall a glaske labourat  
Kannañ gwenn ar rochedoù, ober stamm ha gwriad

Ar re yaouank zo bremañ a zo klask bezañ koant  
Setu aze evit petra on chomet paotr yaouank

Dre ma 'z int bet pell er skol o teskiñ ar galleg  
Kaozeal, lenn ha skrivañ evel alvokaded

Da labourat a gredan n'o deus ket kalz a c'hoant  
Setu aze evit petra on chomet paotr yaouank

Pa gemerfen ur tiegezh, e kemerfen ur vatezh  
Da c'hor, da ribotat, da gas ar saout er-maez

Kar ar wreg ne brizo ket da lakaat he zreid er fank  
Setu aze evit petra on chomet paotr yaouank

Pa vo pardonioù er vro, 'hay en noz da tañsal  
Neuze 'vo klevet o c'hoarzhin hag he zreid o strakal

A-benn ma teuio d'ar gêr, an holl dud 'vo kousket  
An tad a huñvreo start hag ar vamm 'vo nec'het

Neuze 'vo klevet Janig, 'vale dousig d'he c'hambr  
Setu aze evit petra on chomet paotr yaouank

An deiz war-lerc'h he chomo 'pad an deiz 'n he gwele  
Gant ar boan 'barzh he divhar pe an droug 'n he c'hostez

Rak keit ma oa hi o tañsal he deus tapet ul lamm  
Setu aze evit petra on chomet paotr yaouank

Un dilhad eus ar c'haerañ a renko c'hoazh da gaoued  
Ur robenn brodet gant seiz hag un tok alaouret

An dra-se 'vez ket gwall-bell, 'tegas ur mil da bemp kant  
Setu aze evit petra on chomet paotr yaouank